


KERNUEVEZ CITY



★ JAMES BILLY ★

AR VRO BAGAN

KERNEVEZ-CITY

Eur western Kig-ha-Fars

savet ha c'hoariet
gand

AR VRO-BAGAN

Brud Nevez
Emgleo Breiz

Bet embannet gand skoazell

Skol Uhel ar Vro

Fotoiou gand
LE NOUAIL

Poltred James Billy gand
J.P. MELLOUET

Bet embannet gand Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.
Bet moulet gand Mesidou, 40bis, ru ar Republik, 29200 Brest
Bet diskleriet hervez al lezenn : eil trimiziad 1991.
© Strollad ar Vro-Bagan ha Brud Nevez.
I.S.B.N : 2-86775-104-7

Ar Hoarierien

James Billy, rener ar stal.....	Andreo Ollivier
Rocky Billy, e vreur yaouank.. ..	Jakez ar Borgn
Lili, mestrez an ostaleri.....	Nicole ar Vourc'h
An ostiz.....	Paskal Kariou
Linn, Bene, Zou, dañserezed an ostaleri.....	Françoise Saillour Linn Bourdier Bénédicte
Vefa, an dañserez yaouank.....	Vefa Gwenegan
Ar sheriff.....	Bob Simon
Mikael, Dan, Baluj, Yann micherourien James Billy.....	Michel Saout Jean-Louis Le Vallegeant Guy Emily Philippe Abalain
Ar medisin.....	Marcel Berrou
Ar Bankour.....	Yann-Lukaz Leon
An Tad Kouër.....	Yann-Ber Kiog
Ar vamm.....	Naig Rozmor
An tad-koz.....	Goulc'han Kervella
Ar verh.....	Maivon Berthou
Fañchig.....	Fañch Jezekel
Ar Marshall.....	Gerard Gwenn

ARVEST I

EN OSTALERI

(En eur gêr nevez savet er Hornog pella. Lintruz eo pep tra en ostaleri. Eur zadornvez da noz a zo anezi. Ofis a zo en iliz tost, mouez an dud o kana a glever).

Pennad 1

Rocky Billy zo o strakal e voutou, o tiskouez d'an dañserezed penaoz ober.

Rocky Billy

Ata gisti ! Dihastit 'ta! Pa deuiio va breur d'an traoñ e vloh paket sod adarre.

Ar re all zo o c'hoari ha farsal en-dro d'ar piano ha d'ar hontouer. Trouz a glever war-laez, daou zen o vlejaj...

Linn

Da vreur ne ra ket bilou ganeom bremañ.

An ostiz

Tra-walh 'n-eus d'ober gant ar hast koz 'toare!

Zou

Ata krakik! Pa deuiio da vreur d'an traoñ e vo foer en da loerou ! Strak da voutou 'ta !

An oll

A! A! A!

Mond a ra Rocky Billy da azeza, droug en e reor...

An ostiz

Hag eur banne all da Batt Garrett, brasa sheriff ar vro!

An oll

A! A! A!

Linn

Arabad ober bilou, Vefa! Dond a ri a-benn, gweled a ri!

Pennad 2

Strakal a ra an nor en neh. James Billy zeu er-mêz euz e gramp. War e jiletenn, ar hlak-klak gantañ en e zorn. Sioul ar stal. Pep hini en e leh prest da labourad. Diskenn a ra war e bouez, en eur hoari. 'N em gavet e-kichenn e gador e taol e glak-klak d'e vreur Rocky Billy. Hemañ a zav en e zav mezekaet hag e ya beteg ar hontouer...

James Billy

Dal, breur bihan ! Kea da hoari ha n'eo ket selled ouz ar merhed eo !

„ Trouz war-laez, an nor o tigeri. Oll e sellont d'an neh. Lili a zeu er-mêz en eur zeha he daelou, mantell James Billy ganti etre he daouarn. Pa wel emañ o selled outi e sav he fenn hag e tiskenn, lorchuz; treuzi a ra ar zal ha mond etrezeg ar scheriff. Kregi a ra ar bleustradeg dañs.

James Billy

N'eo ket mad tamm ebed ! Unan, daou, unan, daou ! Arabad kaoud pennou tourtell! Emberr ez eus tud da gaoud amañ ; ha n'eus nemet plankennoù dirazo. Peleh e savo c'hoant ha sehed dezo?

Vefa a ra fall. Feulzi ra James Billy.

James Billy

Ha te an hini nevez ! Arabad dit mankoudevid ar wech kenta ma c'hoariez ! Evidout eo e teuio an dud !

Leñva ra. James Billy a floura anezi...

James Billy

Ma ! Uhel an dour ganit 'toare! Dond a ri a-benn, gweled a ri !

Ober mad en-dro.

James Billy

Mad eo ! Ale, kit da lakaad mohaj ouz ho kenou.

Vefa a ya da heul Linn ha Zou, James Billy a bak anezi dre he zargreiz ha bounta anezi en deleziou ...Pignad a ra ive ha chom a-zav, hanter zavet en deleziou...

James Billy

Prest e vo va mantell a-benn emberr ?

Lili a-zav hag a zeu e-kreiz..James Billy a ziskenn...

Lili

Del ! N'on ket plah ganit !

James Billy

A-wechou out bet kontant da veza !

Lili

Ya ! P'oa c'hoaz kaoh ouz da reor oas kontant da gaoud-unan bennag da riñsa anezi dit !

James Billy

Ya ! Gand da henou leun a voeson ! Prestig vi breinnoh evid hennez !

(Diskouez a ra ar sheriff azezet ouz taol).

Lili

Pemoh brein !

Sevel ra James Billy war-lerh Vefa. Lili a chom da zelled outo. Rocky Billy zo deut da azeza e kador James Billy gand eur voutaillad whisky...

Rocky Billy

Kavet 'n-eus ar hillog koz eur yar yaouank da lakaad e-leh ar glochenn goz en e wele!

Lili a ya da denna ar voutaill dioutañ, ha mond etrezeg ar sheriff 'n eur lared :

Lili

Pegeid e chomoh c'hoaz gand ho kenou da baka kelien ? Echu an overenn prestig ! Amañ ez eus plijadur da gaoud dizale ! Non d'eun distag !

Zou, Linn ha an ostiz a laka goulou, tenna ar ridoziou... An ostiz a laka gwin war an taoliou...Lili zo azezet gand ar sheriff.

Lili

Dal ! Hemañ n'eo ket staot ki eo!

Rocky Billy

Rei whisky mad d'al lonker-se. Gwelloh gantañ kaoud santa Roza. .. Marteze savo dezañ gand hennez hag ez ay d'en em ganna ouz Kalamity Jane pe Billy ar C'hid !

Sheriff

Ya ! Peleh emaint ? Ne vin ket pell oh ober o stal dezo. Deus amañ 'ta Kalamity, mar dout eur gwaz !...

Lili

Azez amañ 'ta !

(Lakaad anezañ da azeza en eur lavared da Rocky Billy) : Inosant! Falloh evid da vreur out c'hoaz)...

Pennad 3

Son ar hleier. Trouz tud. Youhadennou. Redadenn ar vicherourien er penn all, dond a reont dre lost ar zal An ostiz a daol eur volotenn dezo. C'hoari a reont gand ar volotenn.

Lili

Peoh bugale ! Bremaig vo torret va zraou ganeoh !

Mikeal

Peleh ema ar merhed ?

Yann

Unan nevez a zo 'toare ! Penaoz ema-hi ?

Baluj

Prim ! Evid mond ganti !

Ar re all

O ! Genou braz !

Rocky Billy

Re ziwezad oh paotred ! Paret eo dija !

Mikeal

Gand piou ?

Lili

Peoh paotred ! Ha pasianted ! Ale ! Lakit traou en ho kov ! An hanter diouz ho pae a ranko chom en ti-mañ hirio.

Mond a reont ouz ar hontouer de eva.

Pennad 4

Erru ar pennou braz. Kenwerzourien, ar barner, ar bankour. Treuzi ar zal en eur gomz.

Kenwerzour

Ket ! Ne fell ket dezo diskregi laran deoh !

Ar Barner

Red vo dezo koulskoude !

Ar bankour

Penaoz lakaad anezo da blega a gav deoh ?

Ar Barner

Hirio e rankont sevel a-du ganeom !

Kenwerzour

Ma votont a enep deom ne vo ket anvet !

Lili a zigemer anezo a-gostez.

Lili

Nozvez vad aotrouien !

O-zri

Noz vad deoh. En e gramb ema ?

Lili

Ya ! Eno ema ! *(Krog eo an aotrouien da zavel gand an deleziou).*

Yann

Ar merhed, non dé dié !

Distrei a ra an aotrouien o fenn. Chomet int a-zav. Faeuz. Sevel en-dro.

Pennad 5

Ar gouërien o tond en ostaleri en eur vandenn. Mond a reont da azeza ouz taol. Ar verh a houlenn marhadourez digand an ostiz.

An ostiz

Hag eur pakad Vermisel d'an dimezell !... Hag eur pakad chikore!

Paea 'ra ha dond kuit. Paket eo e-kreiz ar vicherourien, koueza 'ra he fakad vermisel. C'hoari reont gantañ. Ar verh a glask paka anezañ. An tad ha Fanchig, ar mab, zo savet, kounnar enno.

An ostiz

Amañ Radio Kernevez ! Setu a-raog an abadenn vraz eun abadenn etre strollad Spontuz Kernevez hag ar strollad Vermisel euz Ker-an-Dour... Ema ar bolotenn gand paotred Kernevez, ha setu bremañ

Fañchig 'n-eus paket krog er pakad vermisel, rei anezañ d'e hoar ha kregi e kolier eur micherour prest d'en em ganna outañ...

Fañchig

Ata ! Lanfre braz ! Lonket eo da deod ganit ?

An ostiz

Med freuz a zo savet bremañ etre eur c'hoarier Spontuz hag unan euz Ker-Vermisel hag...

Fañchig

Ro peoh 'ta te gand da radio brein, n'eus nemed koniriou e-barz !

Lili a dosta hag a zeu da zispartia anezo...

Lili

Ale ! Bugale ! Roit peoh ! Bremaig po ket nerz ken, pa deuio ar merhed d'an traoñ !

Diskregi a reont an eil diouz egile, kas en o daoulagad.
Rocky Billy a vod e dud en-dro d'ar hontouar da isa anezo,
sellou a-gorn ouz ar gouerien.

Lili

Eur banne da gement hini! Me a baeo! Eur voutaillad amañ
ive !

An ostiz a zeu da lakaad eur voutaillad all war daol ar
beizanted en eur ober eur bern ardou.

Pennad 6

James Billy hag an Aotrou o tond d'an traoñ. Ar vicherourien en eur zistrei, beb a werenn en o dorn, hag en eur strakal o bouteier.

Ar Vicherourien

Hey!

James Billy

Hey !

Strakadeg daouarn.

James Billy

Ahanta tudou ! Penaoz ema ho penaoz ganeoh ?

Oii

Barreg !

James Billy

Ma ! Ganin-me ema ive ! Noz vad e lavaran deoh !

Oii

Noz vad...

James Billy

Chut ! (Gand e zorn). Traou nevez a zo ganin ! (C'hoarz er
zal).

James Billy

Gouzoud a ran n'eo ket anad c'hoaz ! Warhoaz a ouzoh ema
an abadenn vraz evid ar hampionad...
An ostiz a daol ar bolotenn dezañ...

James Billy

Hag arabad deom koll warhoaz ! Ne vo ket maoutet
Paotred Spontuz Kernevez gand paotred al lostou laou alato !

Oll

Tra !

An ostiz

Amañ ez euz kig... amañ ez euz farz.. amañ ez euz kig ha farz !

James Billy

Ma ! Evid rei muih a startijenn deoh em euz aozet deoh emberr eun abadenn vrao ! Kanaouenn ha dañs forz pegement ! Ha traou dizolo, me lar deoh. Hag evid ar wech kenta e weloh Vefa ! Eizteiz zo ema-hi o teski he micher ganin ha n'eo ket bet pell o teski, me lar deoh ! Diwar ar mêz e teu med n'eus ket kaoh saout ken ouz he boutou...

An oll o sutal.

James Billy

Pasianted ! Prestig e teuo er zal ! Taolit evez paotred ! Arabad sacha re war ar merhed emberr, a-hend-all ne vloh ket domino war an dachenn warhoaz ! Hag arabad da baotred Kernevez beza boud gand jeuiou e-mod-se !

An oll o c'hoarzin...

James Billy

Bezom siriuz bremañ eun tammig! Rag fall ez a an traou ganeom... Savet eo braz an uzin amañ ganeom. Roet em-eus me labour da galz a dud hag o-dije ranket mond da bell war-lerh o bara e-giz all...Me eo em-eus roet tro da dud yaouank ar vro-mañ da chom da labourad ha da veva er gêr... ha da zavel o famill en onestiz hag en êzant...N'eo ket gwir ?

Oll

Eo ! Re wir eo!

James Billy

Ma ! Gouzoud a rit, gand ar gouarnamant a zo bremañ ema an oll uziniou oh ober freuz boutik ! Uzin Kernevez ive a'z aio

d'an traoñ prestig ma ne hellom ket kreski ! Ha ne hellim ket kreski ma ne hellom ket kaoud dour a-walh evid kas ar stal en-dro ! Med siwaz n'om ket mestr war an dour a zo e kreiz douarou Ker-an-Dour. Setu perag em-eus lakeet va ano evid mond da Gannad! E-mod-se e hellin labourad gweloh evid dalher an uzin en e zav ! Setu warhoaz pa'z eoh da voti, soñjit mad en ho labour, en ho pugale, soñjit er vro !

Ar Sheriff

Aotrou ! Digarez a houlennan med eiz eur hanter sonet eo ha serr eo ar hampagn abaoe 6 eur !

James Billy

Ya ! Serr eo ar hampagn med digor eo ar champagn !

Oll o hoarzin... Rocky Billy 'n-eus diskarget eur werennad dezañ. O vond da eva ema . Lili a gemer ar werenn ha strinka ar boeson ouz genou Rocky Billy. Kas ar Sheriff da azeza.

James Billy

Warhoaz, edon o lavared, soñjit mad en amzer da zond ! Oll e rankoh voti evidon ! Ha diganeoh ive tud Ker-an-Dour e houlennan voti evidon. E-mod-se e tiskouezoh oh a-du da laosker pe da werza lod euz ho touarou hag ar ster evid kreski an uzin...

An tad

An douarou-se zo deom abaoe pell 'zo hag an dour on-eus ni ezomm evid al legumaj hag evid ar chatal.

James Billy

Ne helloh ket, c'hwi, eur guchennig tud, dalher an hanter euz ar barrez evidoh hoh unan ! Red eo ranna gand ar re all hag o-deus muih ezomm.

An tad

An douar hag an dour zo deom !

Ar barner

Re a zouar ho-peus. Eur priz mad vo roet deoh. Evid douarou ha ne dalvezont ket eur sikad¹ butum !

Ar verh

Ne dalvezont ket ! Gand al labour a zo bet ganto !

Ar bankour

Uhelloh er menez e helloh kaoud douar ken mad all. Pe chom ive da labourad en uzin !

Fañchig

Er menez da drei mein da zeha ! Pe labourad en uzin brein ! Biken ne rin !

An tad

An douar-ze hag an dour-se zo deom!

James Billy

An douar-se zo deom ! Klevit anezañ, n'eus nemed ar ger-ze en e henou ! Kaoud a ra deoh e chomoh atao mistri war an douarou hag ho-pezo mevelien da ober ho labour. Me zo bet o terveza gwechall e ti ho tud hag e ouzon piou oh ! Me 'm-eus greet tud digabestr gand va labourerien ha n'o-deus ket ezomm ken da vond da houlenn an aluzenn diganeoh !

Fañchig


Arabad selaou anezañ ! Geier toud a zo dioutañ. Tud digabestr! C'hoarzin a rankan ! Mond a rafent da lipad e voutou evid plijoud dezañ...

James Billy zo diskennet, e dud war e lerh.

James Billy

Lavar en-dro 'ta mouz-kagal! Ma vefe moustret war da fri e teufe lèz er-mêz.

¹sikad : chikad



Ar Marshall Fiztermann hag ar Sheriff

Fañchig a lamm warnañ. Rocky Billy a bak anezañ. Tri
daol dorn. Ledet Fañchig war an daol. E familh oh ober war e
dro .

James Billy

C'hoaz 'peus da zeski gand paotred Kernevez. Ha da hoar
n'eo ket difeson ive ! Petra soñjit paotred ? Ma vije eun tutu
diouti e-leh al lostenn goz a zo ganti ?

James Billy

Ale ! Banne ar bloaz nevez ! N'eo ket re ziwezad c'hoaz!

Pennad 7

An ostiz gwisket e doare a ginnig an abadenn a vo rannet e tri damm :

1) Diskenn ar merhed ha dañs strak-boutou ha french-kankan.

2) C'hoari ar sheriff lakeet d'ober eun tamm folkloraj diwar-benn e vuhez wechall p'oa maout d'en em ganna gand e bistolenn.

3) Kanaouenn Vefa. "Pacific Dihasti"

Noz-mañ 'm-eus kousket tamm
O tamm ebed, o nann
Noz a zeu 'rin ket c'hoaz
Sur nann, ne rin ket
O selaou kezeg diroll, kezeg foll
D'an daoulamm, en-dro d'ar ganol.

Trip-trep, trip-trep, trip-trep
Tan dir ha tan, o tan!
Pa strak ar hern em noz
E teu da zoñj din
Spontusa nozvez
Bet en va zamm buhez
P'oa lazet Ringo.

Ne oa med c'hwezeg vloaz
Ne oa ket c'hoaz, o tra!
'Pad 'n deiz er hoajou braz ez oa boaz
Na da labourad kement 'vid eur gwaz
Da denna er vro dezañ n'oa ket par
Na Yann Vraz, na Youenn al laskar.

Taol evez, Ringo gêz, o ya, taol evez!
Traiz eo bed ar re vraz
Ar bed-se a laz
Gand da golt eh en em gavez re vaout
Dre forz klask da vestr, ez out sur d'e gaoud


Trip-trep, trip-trep, trip-trep
'Pad an noz o hlevan
O strakal hern em fenn
Forz peleh ma yan
'Vel Boudedeo dre ar bed e valean
O klask eur mignon a ve gouest da denn'
Trouz ar hezeg diouz va fenn.



Ar Gouz ha c'hoari ar Kanaouenn

Faint, illegible text, likely bleed-through from the reverse side of the page.

Faint, illegible text, likely bleed-through from the reverse side of the page.



Faint, illegible text below the photograph, likely bleed-through from the reverse side.

An Ostiz ha c'hoarieren Kernevez

Pennad 8

Echu he hanaouennou gand Vefa. Strakadeg ha you.

James Billy

Ma ! Tudou, arabad chom da zelled bremañ ! Digor eo an
dañs evid an oll dud, tud Kernevez, tud Kêr-an-Dour...

Mond a ra da bedi ar verh. Lili a bed ar Sheriff. Rocky
Billy a'z a da bedi Vefa en eur ober ardou. Vefa a ra fae
warnañ hag a ya etrezeg Fañchig. Hemañ a lamm war an daol
en eur ober eur strak-boutou. Kregi ra e Vefa endra ma sell
Rocky Billy gand kasoni outañ. Krog eo an dañs. Sonerez. En
deñvalijenn emaint, ha Rocky Billy vez gwelet er goulou,
droug ennañ o c'hoari gand e bistolenn. Mond a ra e-touez an
dud. Dañs laouen. Eun tenn o strakal e-kreiz an dud... Kiza a
reont o tizelei Fañchig gand Vefa etre e zaouarn ha Rocky
Billy en tu all gand e bistolenn o tivogedi.

Rocky Billy

Arabad dit taoler da zaouarn loudour war hounnez, bern
teil.

Fañchig

Anaoud a ran anezi abaoe pell 'zo, aneval !

Rocky Billy

Laosk anezi, laran dit ! Landru!

Vefa a'z a kuit diouz Fañchig. James Billy a vount anezi
etrezeg an deleziou

Rocky Billy

Deus amañ 'ta, fri mihiog ! Ma vo torchet dit !

Fañchig

Ha te, marmouz divalo! Vin ket pell o toulla ahanout !

Ar Sheriff a glask dond etre. Lili a vir outañ.

Lili

Laosk an daou zen sod-se d'en em laha m'o-deus c'hoant.

Gwion

Ata Rocky Billy ! Dihast anezañ 'ta !

Ar verh

Arabad ober, Fañchig, lazet vi !

Mikeal

Kis! kis ! Kee dezañ 'ta, Rocky Billy !

Daniel

N'eo ket brao a-walh dezañ dalher an dour evitañ e rank dond da gemered ar merhed amañ ive !

An tad

Fañchig, chom sioul, en an' Doue !

Rocky Billy

Ata ! Foerer !


James Billy zo tostaet. E dud war e lerh. En-dro d'ar gouerien ez eont. An tad hag ar verh a grog e Fañchig.

An tad

Deom kuit diouz an toull brein-mañ !

Chom a ra ar re all da zelled outo dre ma'z eont kuit. Rocky Billy a hoarz yud. James Billy a dosta outa hag a zistag eur jouellad¹ gantañ. Neuze e sav gand an deleziou, imor ennañ. Ar vicherourien a gas Rocky Billy d'ar hontouer. Eva forz a reont troet o hein ganto.

¹ jouellad : jodad



Ar gouerien goz

Rocky Billy
Lakaad tan !

An oll
An tan ! Lakaad an tan !

An ostiz a ro o mantilli du ha tokeier dezo (heb en em ziskouez re). Lakaad a reont anezo endra ma klask Lili enebi.

Merhed
N'emaoh ket mad !

Lili
Re 'peus evet ! Ne deoh ket da hweza an tan alato !

Rocky Billy a vount anezi d'an traoñ. Ar merhed zo pennfollet o sellad. Trouz kezeg o taoulammad er-mêz. pellaad a ra reont. Nebeud amzer war-lerh trouz eul loan all o pellaad.

Pennad 9

Lili a-zav diwar an douar hag a gomz ouz ar sheriff.

Lili

Ha te ! Petra 'peus greet evid enebi outo, te ar sheriff sañset ! Peleh ema da imor ? Gwelloh e kavez ar gwinn !

Ar Sheriff a-zav, trellet e zaoulagad.

Ar Sheriff

Ya me eo ar sheriff ! Mond a ran da ziskouez dezo ha ne vin ket pell c'hoaz ! Me, Ar Sheriff, buanna tenner ar vro ! Peleh emaint ! Tud a gleiz, a-zehou, dirag, tro-kein, n'on ket nehet c'hoaz evid dihasti anezo kement ma'z int ! ... Riñset an ti ha riñset ar blasenn hag ar paotr Yann mestr war an dachenn !

Koueza ra war benn e zaoulin, berr warnañ. Lili a zikour anezañ da zevel...

Lili

Gweled 'rez petra out deut da veza ? Brein out gand ar boeson. Ne dalvezez ket eun tenn zoken. Goap a reont ouzit...Ma karjez ehana da eva ez afem kuit on-daou diouz ar vro-mañ...

Ar Sheriff

Mond da beleh ?

Lili

Da forz peleh ! Skuiz maro on gand ar vuhez er vro-mañ. Fallgalonet o weled penaoz e tro an traou er gêr-mañ, penaoz e vezan kaset gand hennez em-eus bet sikouret da zevel diouz mevel ma oa pa oa deut en ti-mañ da glask labour. Gweled rez petra eo deut da veza bremañ ! Me eo em-eus greet anezañ ha greet an ti-mañ ! Kas em-eus outañ ! Kas ! heb ehan o klask merhed yaouank hag o tamall din beza kosoh evitañ. ... Echu

ar gêr-mañ evidon. Deom kuit on-daou eun dervez bennag da glask eun toull all da veva...

ARVEST II

Pennad 1



Da zadorn da noz er Strak-Bouton

ARVEST II

Pennad 1

An dizro d'ar gêr

Tad

Mez am-mez ganeoh beb tro ma'z eom e kêr asamblez!

Ar vamm

Ne hellez ket chom reiz biskoaz!

Fañchig

N'eo ket me 'm-eus klasket hirio!

Ar verh

Re vraz eo da henou ha re hir da deod!

Fañchig

Petra ri! Pa glevan tud e-giz-se, ez a kounnar ennon.

Tad

Eun dervez bennag e vi lazet ganto!

Fañchig

N'o-deus ken med klask!

Ar vamm

Kaoud a ri da vestr, mab! Taol evez!

Tad-koz

Buannoh evidout-te e tennont. Eun dra ken e helli ober marteze : konta an toullou a vezo en da gov.

Ar verh

Ha c'hoaz!

Tad

Me ive zo bet pront e-gizdout-te. Serra va genou 'm-eus desket ober. Paneve-se 'oan brein en douar pell 'zo pe lonket gand ar brini du, eskern hag all...

Tad-koz

Me 'm-eus bet chañs ive. Va hamaladed zo maro en-dro din. Me oa re galed va hrohenn, kredabl...

Ar verh

Ar hezeg koz zo diêz da laza!

Fañchig

C'hwi zo prest da laosker ar vro da vond ganto! Stanka ar ster, beuzi ar parkeier, ha kas ahanom da zutal!

Ar vamm

Stag om ouz an douar-mañ. Med petra a hellom ober 'eneb dezo?

Tad-koz

N'eo ket difeson ar ganerez yaouank! Gouzoud 'ra ar gaster koz-se kaoud inizi yaouank da lakaad en e glud. N'oa ket kalz a dra ganti war he reor. Eun taol avel izel hag e oa displuet. Sell! ma vijen bet yaouankohig, em-bije bet eun tamm outi¹ outi ive...

Fañchig

Roit peoh din gand hounnez.

¹ outi : c'hoant.



Ar gouërien

Ar verh

Hañ. Hemañ zo brein ar viou dindanañ ive. Diêz e kavez,
paotr yaouank, e vije eet da werza he hig e kêr e leh chom
ganit war ar mêz!

Fañchig

Kee, te ive, mar kerez! Marteze e kavi fret d'az teod a-
hont!

Trouz ar hezeg o hourichal hag o pavata er hraou.

Tad

Sell 'ta! Petra zo o c'hoari gand ar hezeg? Serret mad 'poa
warno, Fañchig?

Fañchig

Ya!

Pennad 2

Ar vandennad vicherourien gwisket e du zo difoupet er bradenn vraz. D'ar pevarlamm ruz e teuont da gaoud an tiegez ha tan dezi! Ken a grog flammou braz er hreier, el lab, er hrañj, er hoadañ hag er berniou kolo. Spontet mik eo ar chatal.

D'ar red e ya ar gouerien da zisatga o loened ha da glask mouga an tan.

Pennad 3

Pell amzer war-lerh int deut a-benn euz an tan, well-waz. Mond a ra ar wazed da lakaad o fistolennou., en o gouriz. Ar merhed a ya da ebebi outo.

Ar verh

Ne deoh ket d'en em ganna alato! Gwelet peus ped int!

Fañchig

Netra 'bed. N'int ket ouspenn deom!

Ar vamm

Arabad deoh mond! Ne helloh ket enebi outo!

Ar verh

Red eo mond dre al lezenn!

An tad

Peseurt lezenn? N'eus lezenn ebed ken er vro-mañ.

Fañchig

Arabad selaou anezo, tad. Deom atao!

Tad-koz

N'eo ket echu an abadenn er vro-mañ c'hoaz, 'toare. Nag a boan zo bet ganti koulskoude. P'oa deut on tud koz da chom amañ n'oa ket deh oa. Prometet oa douar mad dezo. Diouz ar zao-heol oant o tond. Pevar mil kilometrad o-doa da vale. N'oa ket mond da foar Lezneven oa, kea!

Ar vamm

Pevar mil kilometrad gand ar hirri pounner, ar vugale, ar hezeg, ar zaout, ar moh hag ar maout!

Tad-koz

'Kreiz an hañv oant lohet... 'Kreiz ar bouldrenn hag ar hor... ar zehor kras, ar zehor ruz... tamm disheol, tamm

diskuiz. Pad an deiz o vale, o vale. Hag en noz o tiwall diouz ar bleizi...

Ar vamm

Pevar mil kilometrad gand er re goz hag ar vugale....

Tad-koz

P'a deut ar goañv n'oant ket en em gavet c'hoaz. Ar goañv kriz. Skorn kaled, erh teo, avel sklas... Hag o vale atao! Ped a zo deut betek ar penn...

Ar vamm

Bugale! Ped a zo marvet a-raog en em gaoud? Ped euz ar re goz a zo chomet da vervel war bord an hent? Ped gwaz, ped maouez a zo eet ar skiant vad diouto?

Tad-koz

« Sav! 'rabad chom a-zav! A-hont ema an douarou a glaskom! Ne welez ket? Ar gwez uhel a-hed ar ster, ar foenneier glaz! Ne glevet ket an dour o kana war ar vein?» Ped gwech on-eus bet an huñvre-ze? Trellet on daoulagad. Ouspenn c'hweh miz oant bet o vale. Ar hor, ar skorn, ar bouldrenn, ar skuister. Tamm da zrebi, banne da eva.

Ar vamm

Bugale ha tud koz war vord an hent. Boued d'ar brini ha d'ar bleizi.

Tad-koz

« Arabad chom a-zav! A-hont ema ar gwez uhel, ar foenneier glaz, ar steriou sklintin!»

Ar vamm

Va ridell ya! P'oant 'n em gavet oa nemed mein o seha war an douar... Gwezenn ebed, banne dour ebed!

Tad-koz

Ha dihagnet o-deus m'hel lavar dit! Evid tenna eun dra bennag diouz an douar-mañ.

Ar vamm

N'o-deus ket bet damant d'o horv, kredit ahanon!

An tad

Ha bremañ, penaoz ema ar vro? Drebet an douarou gand eur hlasker bara. Gand eun den bet paotr-saout amañ!

Ar vamm

Ha deut ar vro da veza eun toull gisti ha gastaouerien gand ar Madam Lili-ze!

An tad-koz

Ya! P'edon me yaouank e oa deut eur vaouez vras da zalher ostelari. Steredenn Vras 'veze greet diouti, med 'benn neuze oa ridetoh eged eur batezenn pemp bloaz.

Fañchig

Pegeid e chomoh aze da zrailla lann adarre? Lakait an dominoiou war an daol 'ta! Dihastet eo bet ho traou hag oh kontant c'hoaz!... Warhoaz ez eoh er parkeier da blanta traou e leh ar re zo dihastet deoh. Nebeutoh a vaiz ha muioh a freuz a ranker ober er vro-mañ!

Mond a ra er-mêz ha ya war e varh etrezeg kêr. E dad war e lerh. Pellohig en eur frañchuzenn ema ar baotred zu ouz e hortoz.

Fañchig

C'hwi eo 'zo bet o c'hweza tan en ti-ni. Larit d'ho mestr, James Billy, e rin e stal dezañ p'en em gavin gantañ. Prun 'n-eus da gaoud diganin; lonka e loa a raio, m'hen asur deoh.

Mond a ra da denna. Tennou a strak. Hag eñ d'an traoñ. An tad a zired, ar re all a deh. Taoler a ra e dad anezañ war e loan ha d'ar gêr.

Pennad 4

Er gêr adarre. Mantret an oll ouz e weled.

Fañchig

Laoskit ahanon, n'on ket glazet!

An tad

Gwelet 'peus! Gand da henou braz!

Ar verh

Lavaret 'm-oa n'oam ket evito. Red eo ober gand al lezenn!

Ar vamm

Ya, red mond dre al lezenn!

Ar verh

Peogwir n'ouzez ket tenna ouspenn!

Fañchig

Me nul da denna?

An tad

Peoh pelloh ganeoh! Skriv al lizer neuze d'ar Marshall
Fighterman!

Ar verh hag an tad a zeu etrezeg an daol.

An tad

Lavar dezañ penaoz om bet taget en noz-mañ!

Tad-koz

Laka dihastet kentoh!

An tad

Ha c'hoaz n'oa ket ar wech kenta!

Ar vamm

Laka e vez ampoezonet dour ar ster ganto ha trohet ar
paotr-saout deom!

An tad

Laka eo bandenn Jamez Billy e-neus greet.

Ar verh

N'heller ket skriva ma n'eur ket sur!

An tad

Sur om! Kavet em-eus an dra-mañ war-dro ar hraou.

*Oll e sellont ouz ar pezh zo en e zorn, eur penn ognon da
verka an eur. Ar verh o kloza al lizer. O lakaad he mantell. O
lavared kenavo d'he zud. Trouz he loan o pellaad.*

Tad-koz

Warhoaz e helli chom en da wele. Nebeutoh a zaout vo da
horo.

Fañchig a chom da gana tra ma ya ar re all da gousked.

"Gwerz an Domino"

Ha deom da hoari domino!
A re all o c'hoari domino
Ha kemend-all a freuz er vro
Gand James Billy
Penn e histi.

'Pad ar zizun o troha kaol
Da zul domino war an daol
Ha boud ha boud ha boud beb taol.
O! ya, taol evez, James Billy
Eun devez bennag e paki
Ar par-bide diwar da fri.

ARVEST III

En ostaleri

Pennad 1

.En ostaleri. Ar vicherourien, war goro o roched, zo war-dro Ar bankour ar medisin a zo o lakaad ar vreh¹ dezo . O farsal emaint kenetrezo O lakaad e zillad ema James Billy.

James Billy

Gast! Gourd eo va breh gand al louzou brein-ze! Alo medisin , laka louzou dezo! Arabad dezo beza klañv er bloaz-mañ!

Lili

Deuit amañ da houde da baka eur haz-dall pe eun tamm kig-moh.

Mikeal a zo e dro da vond. Sempla pa vez lakeet, ar bikuren dezañ.

Ar medisin

Hañ! Genou braz.

Rei a reer jouellad dezañ da zihuni hag e gas d'ar gegin. .

¹ ar vreh: ar vaksin

James Billy

Tro ar merhed bremañ. Me 'm-eus bet c'hoant e pakfe va micherourien kleñvejou ganto. Hann! Hañ!

Linn

Ni eo a bako ganto yañ! Loudourroh evid moh int!
Vefa a ya da ziskouez he skoaz d'ar medisin...

Bene

Gand petra e labourez ?

Zou

Choant 'peus e vije dihastet da skoaz dit gand hemañ?

*(Dizelei ra he garr ha diskouez anezi d'ar medisin.
Hemañ a lak louzou 'barz... Ar baotred a zut. Rocky Billy a
ziskenn e vragez ive. C'hoarz er zal. . .)*

Linn

N'eo ket divalo e reor d'an aotrou bihan!

James Billy


Eun dañserez nevez am-eus kavet!

Paotred

Ouais!

Rocky Billy

Grit goap mar keroh! Me am-eus ezomm diouz va divreh evid labourad ive.



Madam' Lili



Pennad 2

Ar medisin

Ata Sheriff! Penaoz ema ar bed ganit?

Ar Sheriff

Bof ! Arabad klemm...

Azeza 'ra e-kichenn ar medisin... Hemañ e-ser komz, a zello ouz an daoulagad, an teod, an nervennoù..

James Billy

Ar sheriff a yafe da vaksina lo gwech ar bloaz na pa ve ken evid kaoud eur banne evid netra bewech...

Ar medisin

Perag e krenit kement-se?

Ar Sheriff

Tri dervez zo 'm-eus ket evet banne.

James Billy

Aon zo kroget en e reor abalamour e teu ar Marshall Braz hirio amañ!

Ar medisin

Da bed eur ema da zond?

Ar Sheriff

Da deir eur.

James Billy

N'eus ken med dond ma kar. Me n'on ket nehet gantañ!

Ar medisin

Perag 'peus trohet re vuan ar gwin?

James Billy

Kas anezañ da droha keuneud vo ranket ober.

Lili

Roit peoh dezañ gand ar boeson! N'oh ken med daou bez fallagr!

Ar bankour

An nervennou zo paket ive, sheriff.

James Billy

Abalamour d'an tangwall zo bet disul e teu ar Marshall?

Lili

Ya eun dra vras 'peus greet aze! Ezomm 'poa te mond da heul da vreur? 'Peus kel muioh a skiant evitañ ive 'ta?

James Billy

Me, bet o lakaad tan? Den 'n-eus gwelet ahanon amañ! Hein Sheriff? Unan bennag 'n-eus gwelet ahanon?

Sheriff

Memestra oh bet gwelet o vond...

James Billy

O vond da beh?...Pegeid zo out sheriff amañ?

Ar Sheriff

Ugent vloaz vo er bloaz-mañ

James Billy

Er bloaz-mañ eo emhout da zével uheloh sañset?

Ar Sheriff

Ya! E-mod se, yañ, e hellin mond kuit diouz al leh-mañ...

James Billy

Gouzoud a ra ar Marshall e kavez mad da vanne?

Lili

Petra 'peus c'hoant da lavared?

James Billy

Ne blij ket dezañ al lonkerien, 'toare.

Ar medisin

Dipituz e vije ma teufe da houzoud.

James Billy

Ya, dipituz braz e vije! Ne ouezo ket, hañ, sheriff, ne ouezo ket e kavez mad an hini zu... Alo, deom da baka eur banne. Dond a rez, sheriff?

Ar Sheriff

Ket! A-walh 'm-eus bet.

Lili

Deom da di ar perukenner. O hortoz ahanom ema.

(Mond a reont 'mêz dre zor ar gegin. James Billy a laka ar radio en-dro.)

Pennad 3

An Ostiz

Amañ Radio Kernevez, Radio gwirionez! Ahanta tudou! Penaoz ema an traou ganeoh?

Paskalos eo zo ouz an draillerez lann hag... ouz ar pilligou. Disul eo bet anvet an Aotrou da gannad, da zepute, er vro. Gand tost da 95 % eo deut ar maout gantañ. Ar pezh oa pouezuz eo bet anvet ive gand peizanted Kêr-an-Dour o-deus diskouezet evel-se e felle dezo gweled ar vro mond war-raog.

"Trip trip trep, ema ar hezeg", setu aze ar ganaouenn nevez a zo bet skivet disadorn diweza evid ar wech kenta en Ostaleri ar Strak-Boutou. Gand Vefa eo bet kanet, eur ganerez hag eun dañserez dispar, nevez dizoloet gand an Aotrou... Sur ez aio pell Vefa!

Disul diweza edo an abadenn vraz evid ar foot. Paotred Spontuz Kernevez a oa o stourm ouz paotred al lostou-laou. Evid tro ziweza ar honkour edont o vond da dourta hag anad deoh ez eus bet cheu... Div eur oa pa zeuas ar hoarierien war an dachenn...

Pennad 4

Youhadeg. Goulou - Bannielou - Diskenn a ra ar hoarierien, merhed hag all ganto. Poltred war al leurenn, James Billy en o hreiz. . .

Paskalos

Setu m'emaom war an dachenn. Skipaill Kernevez a zo en he gwella ha dirazo ar baotred all a zo gwall lostog! Lohet eo an abadenn...

Taolet ar volotenn er zal. Sikan etre ar merhed war al leurenn. Ar hoarierien a chom a zav da zelled outo. Kregi endro. War al leurenn unan a bil.

Paskalos

Opalala! Eun taol fall a zo bet c'hoariet gand unan euz Kernevez... Goulenn a ra ar barner gweled en-dro war ar video... (C'hoari gouestad ar pennad Echu eo an abadenn. Ar maout roet gand James Billy d'e hoarierien).

Paskalos

Gounezet an abadenn gand paotred Kêrnevez n'oa ket echu o dervez ganto, anad deoh! Anad deoh ez eus bet gouel braz ganto da houde-ze en ostaleri ha plijadur forz poegement...

French cancan gand ar baotred, ar merhed o selled outo.

Pennad 5

Ar radio

Petra zo nevez a-hend-all abaoe penn kenta ar zizun? Hirio eo ema ar Marshall... da zond da Gernevez. Piou eo ar Marshall-ze? D'e ugent vloaz oa Marshall dija an hini yaouanka oa er vro. Ouspenn hanter-kant a lanfridi en-deus bet lakaet krouga dija ha n'eo ket echu. Buanna tenner ar vro eo ha gwech ebed ne da e denn a-biou. Lesanvet eo ar Higer pe hoaz ar Hrouger...

D'ober petra e teu da Gernevez? Da glask gweled sklêr en tangwall a zo bet disadorn e Ker-an-Dour. Buan e tiganas da zoñj deoh petra zo bet c'hoarvezet eno pevar dervez zo. Wardro unneg oa. Edo ar gouerien o paouez dond en dro diouz warlerh m'oa bet eun tamm sach bleo gand micherourien en ostaleri. A-veh en em gavet er gêr, setu int klevet pavadadeg kezeg ha tan o strakal... Devet ar hreier, devet ar chatal hag eun tamm euz an ti... Gwelet e vije bet micherourien kêr war o hezeg hag an Aotrou er penn ha kredi a-walh a rafen ez eo gwir - ar wirionez a rankan da lavared - rag me va-unan ameus bet gwelet ar vicherourien o vond kuit diouz an ti-mañ war-dro deg eur hanter gand o mantilli du hag o hezeg... Evid an aotrou, ne ouezfen ket lavared rag 'n em-eus ket e welet...

A-benn neuze eo en em vodet ar vicherourien en-dro dezañ. Unan a grog er mekanik. Bourika. James Billy a zo dirag o vutuni sioulig. Pa 'z eont kuit a beb tu, e weler paotr ar radio azezet, leun-wad.

Pennad 6

Ar Sheriff ha Lili a zeu d'ar red. Ar Sheriff zo atao ar zerviedenn en-dro d'e houzoug.

Lili

Petra zo 'n em gavet? Perag eo bet trohet ar radio?

James Billy

N'oa ket kalz a dra. Kempennet eo bet.

Lili

Petra zo 'n em gavet gand paotr ar radio?

James Billy

Ar paour kêz paotr a zo bet strobet gand e vekanikou. Kalz re a glask ober. Ni n'om ken med eur radio bihan.

(Lili a zo en em lakaet da wriad vestenn ar Sheriff)

Lili

Dal! Lak houmañ. Kempennoh e vi.

(James Billy a ginnig eur banne whisky d'ar sheriff. Hemañ a gemer anezañ, nemed evid lakaad ouz e grohen el leh m'en-deus trohet e varo).

Mond ha dond a ra, enkrezet oIl. C'hoarierien domino. Tud oh eva er hontouar..An horolaj : tik-tak...

James Billy

(diwar laez) Lili, peleh ema va moñtr?

Lili

Daoust ha me oar me peleh ema an traou en ti-mañ ken?

James Billy

Medisin gast! Maro eo va breh gand da louzou brein!

An horolaj : tik-tak... An treñ :, sut-sut-sut. An oll o selled ouz an nor... Strak-goulou...

Ar marshall oh en em gaoud. Ober tro ar zal, o selled ouz an dud. Chom a reont a-zav da zelled outañ. Rocky Billy a zell mad outañ rag avi en-deus. Ar marshall a zell faeuz ouz ar Sheriff... Deuet eo ar gouerien en ti ivez.

Ar Marshall

Piou eo ar mestr amañ?

James Billy en em ziskouez war-laez. An oll a zell outañ...

Ar Marshall

Te eo ar mestr amañ?

Grig ebed.

Ar Marshall

Pe ano 'peus?

James Billy

War an ti ema va ano. N'ouzez ket lenn?

Mousc'hoarz...

Ar Marshall

(en eur gemer eul lizer). Galvet on amañ gand kouerien ar Vro... Da lakaad urz en traou. Eun dra zo sur, va gouarnamant a vo seh ha kaled evid an afer-ze!

James Billy

Mad a ra! Me zo a-du gantañ penn da benn!

Ar Marshall

Tamall a reer ouzoh beza bet o lakaad tan en atant Ker-an-dour disadorn da noz!

James Billy
Tan en atant! Klevet 'peus, paotred? C'hwi eo zo bet o lakaad tan?

An oll
Ni? Lakaad tan! Alato!

Kouërien
C'hwi eo, ya! Gwelet oh bet. Te an hini braz aze! Ha te an hini bihan, te oa ive!

Ar vicherourien zo savet.

Ar Marshall
Peoh! Sheriff, grit plas din amañ!

Ar Sheriff a vount an dud a gostez.

Ar Marshall
Prouennou zo! Kavet ez bet eun dra bennag war ho lerh. Lavarit din ta ped eur eo gand ho penn-ognon?

James Billy
Teir eur ha kard eo. Perag?

Ar Marshall
N'eo ket gand an horolaj 'm-eus goulennet. Gand ho penn ognon!

James Billy
E! E!

Ar Marshall
N'oh ket gouest da lavared, kea!

Tenna 'ra penn ognon James Billy er-mêz e hodell.

Ar Marshall
J.B. Pe ano 'peus dija?

James Billy
J.B! Ped J. B. a zo er vro mañ? Hein paotred?

An oll
Me zo J.B. ivez!

Ar verh
N'eo ket gwir. Me eo am-eus kavet ar moñtr-se war e lerh. Atao e veze ar moñtr-se gantañ! N'eo ket gwir?

Kouërien
Eo! Gwir eo!

Ar Marshall
Peoh ganeoh!

James Billy
Goulennit digand ar radio hag ar sheriff piou 'n-eus gwelet ahanom o lakaad tan!

Ar Marshall
Unan bennag oar eun dra bennag?

Kouërien
Ne gredont ket komz. Toud int a-unan!

Ar Marshall
Peoh lavaran deoh! Prouennou a-walh 'm-eus forz penaoz. Sheriff, pakit an den-mañ! Alo, buannoh! Kas a rin anezañ ganin e kêr!

Ar Sheriff, lentig, a dosta ouz James Billy.

James Billy
Ata! Sheriff, krena rez c'hoaz ! Kemer eur banne 'ta !

C'hoarz.

James Billy

Taolit evez, Marshall! Mar kasoh ahanon ganeoh e serran ar stal hag echu al labour. Kant den er mêz. C'hwi gavo labour dezo ?

An oll vicherourien a astenn o daouarn evel James Billy.

James Billy

Ruillennou a-walh 'pezo, Sheriff ?

Sellou. Ar Sheriff a ziskrog. Nehet Ar Marshall. Distrei ra e benn. . .

An tad

Ne deoh ket da laosker anezo alato!

Ar Marshall

N'on ket sur e vije gwir!

Fañchig

N'oh ket sur? Ni 'n-eus gwelet anezo!

Ar Marshall

Gwelet anezo? E-kreiz an noz?

Ar verh

Hag ar moñtr neuze?

Ar Marshall

Ar moñtr? Peseurt moñtr? Ouspenn James Billy 'n-eus eur moñtr...

Ar verh

Ne laoskoh ket anezo d'ober o jeu amañ alato?

Ar Marshall

Petra 'hellan ober ?

An tad

Barn an hini zo kirieg.

Ar Marshall

C'hwi a roio labour dezo? Gweled a rin, diwezatah e teuin en-dro.

Mond a rakuit, lostog an tamm anezañ.

Pennad 8

Micherourien oh eva. James Billy o pignad. Kouërien droug enno.

Fañchig

Eur vez eo pez zo 'n em gavet amañ hirio!

Ar verh

Hag ar foerer all eet kuit eur reoriad vez outañ!

An tad

Echu eo ganeom-ni!

Fañchig

N'eo ket echu! James Billy!

James Billy

Petra zo adarre, fri mihiog?

Fañchig

Te zo kaoz da gement tra divalo zo 'n em gavet ganeom!

James Billy

Klevet 'peus ar justis?

Fañchig

Justis va reor! Ta amañ va justis-me! Prest out d'en em ganna?

James Billy

N'en em gannan ket gand bugale, me!

Fañchig


Aon 'peus te ive kea! Opala! Arabad d'ar re all fiñval. 'Hend-all e toullan anezo. Deus amañ d'en em ganna...

James Billy va 'n em gavet hirio! Eur vez eo pez zo 'n em gavet hirio!
Rocky Billy eva droug da gement tra divalo zo 'n em gavet hirio!
Vefa, klevet 'peus ar justis? Petra zo adarre, fri mihiog?
James Billy eva droug da gement tra divalo zo 'n em gavet hirio!

Rocky Billy

Klevet 'peus ar justis? Petra zo adarre, fri mihiog?

James Billy eva droug da gement tra divalo zo 'n em gavet hirio!



Micher

Micherourien oh eva. James Billy o pignad. Kouërien droug enno.

Rocky Billy hag ar ganerez

James Billy zo 'klask tehoud... Red dezañ en em zivenn...
Rocky Billy eo a denn da genta hag a lah ar houër yaouank.
Vefa, kouërien, merhed ha Lili war-dro Fañchig., Ardou
gand Rocky Billy.

Rocky Billy

Gwelet 'peus. Ezomm am-boa euz va divreh!

(James Billy a zav war laz mezeg... Lili a zeu e-barz, droug
enni).

Lili

Kontant out bremañ? Koz tamm inosant!

Rocky Billy

Petra 'm-eus greet adarre? Divenn va breur! Me 'm-eus
saveteet anezañ! Me 'zo lakaet gwasoh evid eur mevel amañ
'ta? Cheñch a raio an traou amañ dizale.

Lili

Ha te, Sheriff! Ken neant all out 'tao! Pebez ti amañ, eur
vez eo ! ... Pa zoñjan am-eus dihagnet va yaouankiz evid
klask sevel an ostaleri-mañ ha pa welan anezi bremañ etre
krabanou eun neizad lanfreidi!

Rocky Billy

Peoh pelloh gand al leñv hag ar gweñv. Kan ha dañs a
vank deom ha plijadur ha c'houti, non de die! Peleh ema ar
merhed? Alo deuit da zañsal, gisti!

Merhed

Dañsal! 'Ma ket mad da benn ganit! Kea da zutal gand da
zañs. Ni zo eet skuiz gand an dañs!

Rocky Billy

Selaouit mad! Poent pe poent e rankoh senti ouzin m'ho
peus c'hoant da gaoud bara da zrebi!

Merhed

Senti ouzit! Kea da gahad, marmouz divalo!

Rocky Billy a lak Vefa da gana en despet dezi.

ARVEST 4

En Kêr-an-Dour

Ema ar Gouërien o tastum o zraou a-raog mond kuit. Hanter hreet eo o fakajou dija.

Ar verh

Ne fell ket din mond kuit deuz an ti-mañ!

An tad

Petra ri ken !

Ar verh

Laosker a raim on traou mond ganto e-giz-se?

Tad-koz

Gwelloh e kavez beza lazet e-giz da vreur yaouank?

Ar verh

Mamm n'he-dije ket falvezet mond kuit kenneubeud!

An tad

Petra he-dije greet?

Ar verh

Petra he-dije greet? En em zivenn sur he-dije greet!

Tad-koz

Gand petra en em zivenn?

Ar verh

Gand petra? Gand he daouarn, gand he fenn, n'ouzon ket!

An tad

Evidon-me ne enebin ket ken ! Trawalh a dud lazet zo bet en-dro din!

Ar verh

Me a en em ganno!

An tad-koz

Te, eur vaouez? Ne 'm-eus bet gwelet nemed eur vaouez oh en ganna en va amzer! Steredenn vrao a veze greet diouti. Brao oa bet en he yaoukiz, nemed dre forz mond ha lonka, oa deut da veza gweñvet e-giz eur batatezenn deg vloaz... Arabad oa mond da glask kastrillez outi avad... Gwasoh evid eur marh antier! Hounnez a ouie tenna, se!

Ar verh

Me oar tenna a-walh ive!

Tad-koz

(O tiskouez e bistolenn). N'eo ket gand houmañ e ri, yañ. Er brezel pevarzeg am-boa dihastet eur hastad enebourien ganti. Bremañ 'vad ne vijen ket gouest da sponta eun torrad filiped!

Ar verh o tispaka he holt bihan...

Ar verh

Amañ ez euz daou denn!

An tad

Peleh 'peus kavet hennez? 'Ma ket mad da benn!

(Klevet e vez trouz ar hezeg. Dastum a reont o zraou buan)

An tad

Echu eo! Poent eo mond kuit a-raog ma vije greet or stal ouzom.

(Mond kuit. Pelloh e chom an tad-koz da zelled ouz an ti. Kemer a ra gitar Fañchig a-raog kuitaad. Klevet vez sonerez melkoniuz).

ARVEST V

En ostaleri

Pennad 1

Eun den o c'hoari piano. Aotrouien o selled ouz ar gartenn vraz. James Billy en eur horn, azezet. Ar gouërien er horn all, o hedal ar marh-du.

James Billy

Digas eur banne whisky din eta!

An ostiz

Ne chom ket ken. D'ar hao e rankin mond.

Pennad 2

Rocky Billy oh en em ziskouez en neh. Diskenn a ra... Komz gand ar vicherourien. Lakaad cheñch plas d'ar piano

James Billy

'Ma ket mad el leh m'ema eta?

Rocky Billy

Tra! Ne veze ket klevet!

Diskouez a ra eur paz all d'ar merhed,

Mond war-dro ar gartenn.

Rocky Billy

Amañ an hent kentoh.

(An aotrouien a bak ar gartenn hag a ya er-mêz gand micherourien).

Rocky Billy

(d'ar gouërien). Ata! O vond kuit emañ? Eun tamm dale zo gand ar marh du!

Mond a ra war-zu paotr ar piano.

Rocky Billy

Kristan, c'hoari eun dra bennag din 'ta!

An ostiz a zeu da rei dezañ da eva ha da vutuni. Vefa d'e gazelia.

Rocky Billy

Cheñchamant zo da gaoud en ti-mañ! Ar re yaouank er penn bremañ!

Pennad 3

Dond ra ar Sheriff er zal. Da gichenn ar gouërien e teu da azeza.

James Billy

Sell 'ta, Sheriff! Anvet out bet en tu bennag all?

Ar Sheriff

Ya moarvad!

James Billy

Da beleh ez ez?

Ar Sheriff

Ar pella ma hellin diouz an toull brein-mañ!

Rocky Billy

Da gempenn keuneud eo ez ez Marshall?

Ar Sheriff

Ya, da foera whisky kredabl!

James Billy

Piou vo anvet amañ bremañ da Sheriff ganeom?

Ar Sheriff

Eur Sheriff da betra amañ?

Pennad 4

Lili a ziskenn gand he malizenn. An oll a zell outi o tiskenn. Dond a ra en tu dehou ha lakaad he malizenn war al leur. He robenn zo ganti ive war he breh.

Lili

Eur hastad tud zo o hortoz dija, e 'toare!

Rocky Billy

Ya, gand ar memez karrad eo koulz kas an teil er-mêz!

James Billy

Te zo vond kuit, ive?

Lili

O vond kuit emaoom!

James Billy

Piou, c'hwi?

Lili

Me hag ar ... sheriff!

James Billy

Te hag ar ... sheriff?

Rocky Billy

Ya I Komprenet 'peus Hi hag ar sheriff!

James Billy

Ha me va-unan amañ!

Rocky Billy

Te hell mond kuit ivez! Ganti hag ar ... sheriff!

Lili

(O rei he robenn da James Billy)

Dal! Marteze e kavi unan bennag all da lakaad e-barz. Evidon-me, n'em-bezo ket ezomm ken. 'M-eus ket a zroug ouzit. Gweled a ran e-peus kavet da vestr te ivez. Diwar kaz ne gaver kaz nemed e vije targaz!

(Ober ra tro an ti).

Diskennet out dija diouz ar voger Aotrou! Ha te, Zou, eur vestrez all 'peus kavet?

Vefa

Ya! Unan yaouankoh!

Lili

Unan vrao ha yaouank! Taol evez, Vefa! Amañ out deut re yaouank! E-gizdon-me. Amañ e chomi stag, sul-ouel-bemdez. Kosaad a ri amañ ha rouesaad a ray da vignoned en-dro dit. Plah pe gast, sed aze plas ar merhed en ti-mañ. Kompren a ri. Tristidigez a zeuio war da vuhez, Vefa!


Rocky Billy

Ro peoh gand da zarmon. 'Maom ket on iliz amañ, eo!

Lili

Te gavo da vestr ivez poent bo boent, tamm krakig sod!

Pennad 5



Ar Marshall gand ar gouerien

Pennad 5

Teir zutadenn. Erru ar marh-du. O sevel emaint da vond
kuit.

Da genta An Hini Koz hag an tad.

Ar sheriff a zeu da daoler e steredenn ouz treid Rocky
Billy.

Ar verh a vez kinniget ar robenn dezi gand James Billy.
Nah a ra.

Disparti Lili, glaharuz gand James Billy...

Pennad 6

Rocky Billy

Mad! Deom da labourad! Emberr em-eus soñj diskouez traou kaer en ti-mañ! (Rei a ra ar steredenn d'an ostiz) ..Ya, James Billy! Poent vez e ranker diskregi. Mar kerez e laoskin ahanout d'ober war-dro ar c'hoariou. An daNnsou hag ar hanaouennou a rin-me...

Pennad 7

Ar verh o tond en-dro. Kregi el lostenn laosket gand Lili war he lerh, ha lakaad anezi.

James Billy

Mad! Gweled a rez, mous! Gand houmañ on gouest da harpa c'hoaz! N'on ket echu c'hoaz! Konta ar viou 'peus greet a-raog defi. Ouspenn an hanter diouz kêr zo a-du ganin. Me zo am-eus greet ar gêr-mañ hag ar vro-mañ! Me em-eus roet labour d'an dud amañ! Me eo ar mestr c'hoaz! Sevel va biz 'm-eus ken d'ober hag e lakan an oll verhed da zañsal evidon! Eur ger hag ema an oll baotred war o daoulin dirazon! Alo, dañsit! Labourit! An dañs hag al labour! Ganto 'm-eus ganet ar vro-mañ... A! A! A!...

Ar verh

(o tispaka he fistolenn). Gand an dañs hag al labour 'peus lazet ar vro-mañ! Bremañ eo deut da dro ivez!

James Billy

Petra zo o c'hoari ganit?

Ar verh

Daou denn zo en hemañ! Unan evidout hag eun all evid da vreur...

James Billy

Nann ! Arabad tenna....

(James Billy a glask sikour. Lazet eo. Rocky Billy en em zispak hag a denn war ar verh. Mervel a ra. Erru Lili er zal. Mond da leñva war gorr James Billy).

Lili

(da Rocky). Da vreur oa kalz gwelloc evidout-te!
(Trouz ar marh-du o vond da loh).

Pennad 8

Rocky Billy

Riñset an ti ha riñset an dachenn hag ar paotr Rocky mestr war an dachenn!

Bremañ ez ay an traou war-raog!

Ne daolin ket an oll er-mêz! Dalher a rin ganin ar re o-deus diskouezet bolontez vad! Pardonni a ran d'ar re all!

Jamez! 'Tao 'm-eus gouezet ne oas ket gouest d'en em ober diouz an traou modern!

Ne vin ket me ar mestr nemetañ. Felloud ra din labourad asamblez ganeoh ha selaou ahanoh. Me gred ar vro-mañ a zo gouest da vaga eur maread tud. Kollet om bet beteg-henn gand ar gizioù koz. Re vihan an atanchou, re a gaeiou en-dro dezo, re nebeud a draou er parkeier. Re nebeud a uziniou er vro. Stanket vo ar ster ar henta ar gwella, ha kresket an uzin. Warhoaz e vo an hanter muioh a dud o veva hag o labourad e Kêrnevez!

Re a dud a zo chomet da veva diwar diou vioh hag eur wiz koz beteg-henn. Re a beizanted a labourer parkeier kement hag eur boutog. N'heller ket beva diwar eun hanter dervez chalotez, n' eo ket gwir!

Labourad a zo d'ober! Labour on-devo; gounid on-devo ivez ha plijadur amañ er Ruz-boutou! Amañ e cheñcho an traou ivez. Traou nevez!

Beva ha labourad e Kêrnevez!

Emaer o cheñch poltred James Billy. O lakaad hini Rocky Billy en e leh. An ostiz, steredenn ar sheriff gantañ ouz e vruched zo o lakaad gwinn d'an dud. Ema ar hleier o seni. Pront, setu ar bobl en ostalari.

Gwerz Lili

(kanet gand Vefa)

En noz-mañ 'm-eus kousket mad
Noz a zeu rin adarre moarvad

Glevan ket ken ar hezeg foll
D'an daoulamm en-dro d'ar ganol.

Lazet an trouz en va fenn
Gand Rocky Billy en eun taol krenn
Cheñchet ar penn e Kernevez
E-leh Lili on-me mestrez.

Heb mizou-kas da baca.

Nevez-embannet

Goulc'han Kervella: Médecine et littérature en langue bretonne aux XIX^{ème} et XX^{ème} siècles.
Edité par les Editions du Liogan. 336 pages. 100 F (95 F evid Izili Kleub al leoriou brezoneg). (E galleg eo al leor, gand kalz a arroudennou e brezoneg). Savet eo bet an dezenn-mañ « **Medisinèrèz ha Lennegez vrezoneg e-doug an XIX hag an XXved kantved** » evid dougen testeni euz talvoudegez ar brezoneg e-pad va studi medisinèrèz. Euz lennegez eo ez eus ano enni. Euz medisinerezh ivez evel just. Daoust ha talvezoud ar raio da gompren gwelloc'h spered ar Vretoned, o menoz, diwar-benn ar yehed, ar hleñvejou, ar medisinèrèz hag ar vedisined? Set' ar pezh am-eus klasket diskouez gand al labour-mañ.

Arvoriz, gand Mikael Madeg, bet embannet gand Brud Nevez.

El leor-mañ e vo kavet da lenn trizeg danevell gand Mikael Madeg.

Anvet **Arvoriz** rag oll int lehiet resiz e korn pe gorn euz Arvor Bro-Leon : eno e tegouezoh gand tud ar vro-ze : pesketaerien, bezinerien, martoloded a beb seurt hag o gwiragez, maltouterien... eur bedig war zisparti, dezañ lezennou ne gaver skrivet e neb leh, nemed int moulllet e memor an oll eno.

60 L

Dogan, gand Jakez Riou, bet embannet gand Brud Nevez.

N'eo ket anavezet kalz ar pezig-c'hoari-mañ, bet savet gand Jakez Riou diwar-benn tarzadeg "monumant an vez vroadel" e Roazon e 1932. Eur farsadenn a lakaio an oll da hoarzin.

30 lur

Ar Bed gwelet gand Misionerien an XIXved kantved, embannet gand Brud Nevez. 117 pajenn. 40 lur (38 lur evid Izili Kleub al Leoriou brezoneg).

N'eo ket reiz-tre titl al leor-mañ. Frañsizion, Europeaniz, a oa euz ar Visionerien-ze, ha, m'o-deus sellet ouz ar re na oa ket Europeaniz anezo gand daoulagad tud a relijion, ez eo dreist-oll gand daoulagad Europeaniz, ha Frañsizion da genta o-deus greet. Ha pescurt daoulagad! Abaoe amzer ar Hresianed, ha muioh c'hoaz hini ar Romaned, e sellom ouz tud an Douarou Braz all gand dismegañs : ne zebront ket eveldom, ne evont ket eveldom, ne gouskont ket eveldom, ne zesavont ket o bugale eveldom, n'o-deus ket ar memez relijion, ne gomzont ket eveldom, hag e se, neuze ez eus "tud ouez" anezo! Red-mad dim mond da ziviliza anezo, evel ma oam bet sivilizet, ni, paour-kêz Galianed, gand ar Romaned. Komañs a ra Istor ar Frañs gand emgann Alesia, abaoe an amzer ma oa eet ar Frañsizion da zevennaad tud Afrika hag Azia, netra ken evid diskouez e oa red ober e-keñver an dud-se evel ma oa bet greet en o heñver gand ar Romaned. Cheñchamañchou braz a zo bet abaoe m'o-deus tarzet e mil damm Impalaeriezou Bro-Zaoz ha Bro-Hall, med or speredou? on doareou selled ouz "ar re all"? Sur, e sellom outo gand daoulagad nevez, mez e chom ganeom c'hoaz kalz a venoziou direiz, ken diêz eo soñjal e hell an dud all beza disheñvel diouzom - ha memez du-mañ, amañ e Breiz, e hellom santoud bemdez pouez seurt menoziou en or heñver, paour-kêz brezonegerien a zo ahanom.

Neuze, evid kompren ar pennadou-mañ, eo red selled outo evel pennadou istor, eun istor eet da get. Bremañ e soursi muioh ar Visionerien ouz ar poblou a labouront evito : deski a reont o yezou, skriva a reont anezo ma ne oant ket bet greet en a-raog, lakaad a reont anezo da zeski micheriu a-dalvoudegez, ne zellont ket ken ouz o relijionou evel ouz traou didalvez.

E gwerz en oll staliou marhadourien leoriou, hag e ti **Mesidou**, 40bis, ru ar Republik, 29200 Brest, heb mizou kas.

Mikael Madeg: Marvailloù 1 : Kontadennoù euz Gorre-Leon; Marvailloù 2 : Kontadennoù euz Bro-Bagan hag an harzou; Marvailloù 3 : Kontadennoù euz Goueled Leon; Marvailloù 4 : Kontadennoù euz Plougastell (ha Lanurvan); Marvailloù 5 : Laboused e Bro Leon. Peb leorig 30 Lur, peb minikasedenn : 40 L (25 Lur ha 35 Lur evid Izili Kleub al Leoriou Brezoneg). Bet embannet gand **Brud Nevez**.

Greet oa bet eur henstridvadeg kontadennoù pobl tri bloaz 'zo gand Bank Crédit Mutuel de Bretagne ha Radio Breiz-Izel. Bet adskrivet gand Mikael Madeg, hag eun nebeud skoazellerien, setu amañ pevar leorig, 40 pajenn pep hini. Gand peob leor ez eus eur vinekasedenn. Disheñvel eo an niverenn 5 : anezañ eun dibab pennadou komz bet greet gand eur houër, Ogust Seite euz Kleder. Bevet e-neus a-hed e vuhez stok-ha-stok gand al laboused; sellet e-neus outo a-dost kenañ. Ouspenn ar blijadur da glevet pennadou-komz euz an dibab, e hello evel-se an nevez-vrezonegerien, ken niveruz anezo en on amzer, deski distagadur reiz ar brezoneg.

Tavarn ar Vretoned, gand J.C. Bozeg, embannet gand **Brud Nevez**. 50 lur
Plijadur o-deus bet an oll re a zell ouz **Chadenn ar Vro** gand peziou **Tavarn ar Vretoned**. Amañ e vo kavet seiz anezo. Skrivet en eun doare beo-buhezeg, en em gavo an oll vrezonegerien en o êz ganto.

BRUD NEVEZ

ar gelaouenn ha n'hellit ket dianaoud

Ne gomzer ket gwall-aliez euz **Brud Nevez**. Bez' ez eo koulskoude ar gelaouenn vrezoneg ha n'heller ket dianaoud; kalz a gelaouennou brezoneg a vouller, gwir eo : med unan seurt gand **Brud Nevez** n'eus ket. E-kerz ar miziou tremenet he-deus moulllet eun toullad euz ar skridou brezoneg pouezusa a zo bet savet a-nevez 'zo.

Beb miz e teu **Brud Nevez** er-mêz, ouspenn-ze. N'eo ket diêz da lenn, tamm ebed : eeun eo ar yez a skrivom; yah ar brezoneg, sklêr an doare-moulla, ha plijuz d'al lagad. Ouspenn-ze, eo liesseurt an danvez : peadra da dremen eur pennad amzer plijaduruz bewech.

Sur om ne hell **Brud Nevez** nemed plijoud deoh. Kinnig a reom deoh ober eun taol-êsh, ha lenn anezi eun nebeud miziou da nebcuta da weled. **Koumanantit** eta evid eur bloavez d'ar priz ispisial a reom d'ar goumanan-tericn nevez : 110 lur nemetken an deg niverenn (e-leh 130 lur).

Hag ho-po ar blijadur da reseo beb miz ho kelaouenn er gêr. Sur om n'ho-po ket a geuz, ha setu perag e kontom warnoh da goumananti dioustu.

Trugarez deoh en a-raog!

Brud Nevez
6, ru Beaumarxhais
29200 Brést
(dre chekenn-vank)

pe
"Brud Nevez" K.R.P. 893-94 P Roazon.

Kernevez City

4 - 5 a viz meurzh 1883. Emaom e Kernevez, en tu bennag e Bro an Oregon, bro al labourerien-zouar. Gand ar marh du «Pasifik-Dihasti» ez eus bet roet eul lañs spontuz d'ar vourh vihan KERNEVEZ. Eur stal da laza chatal korn a zo bet savet eno zoken.

Gand JAMEZ BILLY, den war raog ha mestr braz e Kernevez eo bet savet. Piou eo JAMEZ BILLY ? Bet paotr-saout kentoh ez eo en em zavet e-unan diwar netra ha savet eo uhel. Kêr a-bez a zo dezañ. E dud en-deus lakaet er renk kenta. Labour a ro d'an oll e Kernevez. Kontant eo an dud anezañ, nemed eur guchenn labourerien-zouar.

Aliez e vez beh etre ar vicherourien hag ar baotred-saout. Dihastet ar hleuziou hag ar girzier, dihagnet an douarou gand ar chatal digaset e kêr da laza, ampoezonet dour ar ster gand al loudouriaj o tond euz an uzin. C'hoaz ez euz beh da gaoutdrag kreski rank JAMES BILLY e stal a-barz chom beo. Ha ret dezañ stanka ar ster da gaoud dour a-walh d'he has en-dro.

D'ar zadorn da noz emao. Warhoaz ema ar voterez evid ar zenatourien. JAMES BILLY 'n-eus lakeet e ano ive. Warhoaz ema ive an abadenfoot diweza.

En TROUZ-BOUTOU emao, toull kuz ar blijadur, ti an aotrou JAMES BILLY. O hortoz tren 9 eur emao. Gantañ ema da zond DOROTHEE STRAWERFIELD, an dañserez nevez. Ema an dañserezed, BRONN SUGAR, CALAMITY ha BABY-LOVE, traou brao ha dispak o hedal anezi. Eno ema ive ROCKY BILLY, breur yaouank JAMES BILLY, eur paotr yaouank pront, treiz, brabañser hag aviuz. C'hoaz ema eno, SWEPS, paotr ar radio nevez savet gand JAMES BILLY, ha neuze BURT MC GWINNESS, gward e Kernevez, eur harg e doull anezañ.

O ren war an ti ema Madam LILLY, mestrez JAMEZS BILLY. Euz Pariz eo ha digaset he-deus bet ganti gizioù ar gêr-gapital, french-cancan na pa ve ken. Treñket eo soubenn etre JAMES hag hi.

Echu an overenn. Erru an dud en ostaleri evid an nozvez vraz...